



## CHANSON AN DANÇOU.

*Var eun ton nevez.*

Tostaït amâ, tud a squient, me o ped hac o suppli ;  
 Manet e zon amâ bouhet gant va oll filosofi,  
 Crignat a ran va biziet, a frotta a ran va zal,  
 Hep gallout biryiquen compren, en laret, ran hep farçal,  
 Ar charmantis d'ar yaouanqis da lampat a da zançal.]

An habitud-se a deu gante, me a gred, var an douar,  
 Pe autramant en contractont da dri bloas pe da bêvar,  
 Vit, p'ello ar grenardezet treina o c'hotillonon,  
 Hac ar grennardet o unan boutoni o braguezen :  
 Na eller pelloc'h o delc'hel, ar yaouanqis zo no fen.

Eun tam oc'h diveat, bêleyen, d'o c'hervel d'ar c'hatekis,  
 Ha pa ve possubl ec'h alfec'h, da gass o c'horf d'an ilis,  
 O speret so en dançou, gant-se ne raint netra,  
 Da galz eus ho questionou o guenoyou a lavar *ha !*  
 Pa c'houlfet hac int vo christen, e respontint *tra la la.*

Neuze ec'h efet en coler, hac o zetrot a ezen, [c'hichen,  
 Ila gouscoude, m'en em souchfec'h, n'en doc'h mann en o  
 Noc'h qet capabl, gant hoc'h oll studi, evelte d'en'em beintan :  
 Pelec'h oufec'h-u c'houi laqat jour en eur c'hoef doublet a ran,  
 Nac ho mouchouer en qalqen, pelec'h oc'h manet breman ?

Ne zeus libouden a bemp bloas na zesco dec'h ho quentel,  
 Bea o deus eur mezelour, pintet int en demezel,  
 Dec'h e voa en e jaqueden, na vouie qet e *fater*,  
 Dantelezet ê e c'houefou, brodet ê e davancher,  
 Friset ê e c'hotelinen, rubanet e boutou lèr.

Me gred e clévan ar zoner savet var e variqen,  
 Tano ê diou scouarn ar merhet, sevel a reont o fenn ;  
 Deustu commançont da vresqel adreus an ed, ar c'hleuyou,  
 Vel pa ve an diaoul var o lerc'h, pe autramant an ancou ;  
 Ha pa ve an ifern da dreuji, bepret e zint d'an dançou.

— 2 —

Pa vint éru var ar blenen elec'h ma vo an ebat,  
 Evit n'eun disquez d'ar botret e clasqint eur c'hleun benac :  
 Neuze fichint o davancher, e tressint o zoaleten,  
 Evit pa dremenno potret charni o amoureuxien,  
 Rei da ema ur zer-lagad d'eguile eur c'hoarzaden.

C'hoez ar botret, pa dremenont, a ra strinca ho c'halon ;  
 O daoulagad zo flamboesou alumet gant Cupidon :  
 Trei ha distrei a reont tout, gant c'hoant da veza qerhet,  
 Quement e c'hrillont gand anvi da veza souden hijet ;  
 Penevert n'en dé qet ar c'his, e largent : hastit, potret.

Ar botret zo er c'hostez all destumet a vandennou,  
 N'int qet evit derc'hel ou bragou, anez caout bretellou ;  
 Ema 'l lèz en beg o friou, roet gand o māmou dé ;  
 Tri ané ne dint qet capabl da gass bioc'h d'ar c'hollè,  
 Cetu eno ar ganfardet a zo tançal nos ha de,  
 Ne oun ha me a zo troublet, pa velan peder demezel,  
 Peb a baraplui zo gante, me gred sei pe satin scler ;  
 Ma vije bet tom'an amzer, o doa peb a barasol,  
 Evit beza distinguet mat hac enoret gant an oll ;  
 O daouarn a zo maneguet, d'ampech roussa gant an eol.

Patientet, ô va Doue ! n'allan mui en em zouten,  
 Eun debiter, bennos Doue, n'eus eur montr en e c'hodel ;  
 Neus messaer moc'h na denved, digoc'her saout na qezec,  
 N'en deus eur bragou pont bian hac eur giletten fleuriet,  
 Na zoug e doc var e scouarn, eur c'horn butun en e veg.

Pévar ha pévar o zeont da zaludi o mestrez,  
 O zoc en o dorn e c'houlont : Be a po ar vadelez...  
 Hep gortós fin d'ar c'hompliment, ar plac'h a respont ia ;  
 Quement e deus c'hoant da lampat, quement e ma bars en joa ;  
 E lec'h rei dean e c'houlen, e carfe en briata.

En eur rond en em laqont, evit commanç da lampat ;  
 Mar de pec'het sellet dançal, o discoe n'en d'e qet mat,  
 Disparisset, jestou lubric, impudicationou,  
 Disparisset, disparisset, danç vocen an eneou,  
 Invantion an drouc-speret, evit boeta ar flamou.

Neuze vo an demezellet, n'int qet pedet da zançal,  
 Oc'h ober an dro d'an dançou, hac oute tout façou fall ;  
 O minou a ziscoe facil int antreet en coler,  
 Mantret e ze o c'halonou ; vit apesi o c'holer,  
 Da gritica an dancierien ec'h implijint o amzer.

Sell, emei, pesort libouden a zo da zançal qerc'het !  
 Ounes a zo eur sovagen na voar na comz na qerzet ;  
 Sel penos e ma e dillat ! sur ne deus qet teir ivis,  
 He zad zo e clasq e vara ; sellit ouzevn d'am bis,  
 Ouspen tregont vloas neus hounont e bléo a so dija gris.

Sell peguer sot e zê ounes e quichen e c'havalier ?  
 Neus fors petra lar ar zoner, ne ra nemet *ter-a-ter* ;  
 An *antrecha*, an *él de pignon* a ra tout gant al *lete* ;  
 Re bouner e ze e boutou, na zistag qet ar *brize* ;  
 Vals, *chasse-huit* n'ententont qet, na voar qet ar *balance*.

Me a vel an eol o cuza, finissa a ra an dançou :  
 Ar plac'het a lamp d'ar botret, da furchal o godellou ;  
 Ret e caout per pe avalou evit terri ar sec'het,  
 Biquen na vint lezet tranqil, qen a lavaro ar botret :  
 Antreomp en hostaliri, m'hor bomp eun dra benaquet.

Complimantchou rei ar merc'het, pa gommancint da eva ;  
 Mes na vo qet fin d'ar barti, na vo int ar goassa,  
 Goalc'hi reont o gorsailen, güin ha gist a dremenont,  
 Carzet e godel ar botret, ha bepret e leveront :  
 Qen a yo bet ar güin-ardant, biquen d'ar gær na yefomp.

Crial ha huchal a reont, en hent bras var boes o fen,  
 An nep o c'hlevfe, a greufe eve eur loar o tremen :  
 P'eruint en o demeuranc, deus-tu clasqint ar c'haignou,  
 Ha ne zeus den evit compren petra a reont eno u ;  
 Badiantchou hep son cleyer alies zo 'n effejou.

Ar plac'h na gavo potr ebet zo en ber instant chanchet ;  
 E c'hoef a laq var e bisaich, adieu a laro d'ar bed ;  
 En e dorn zo eur chapeled, sances e ma o pidi ;  
 Pa sonch en amzer dremenet, ne ra nemet hirvoudi,  
 C'hoant e deus da vont d'ar gouent, ha mui c'hoas da zemezi.

Cetui-ta en oregon, hanval e eus eur santez,  
 E ma' prometi da Zoue ferm na zemezo jamæs,  
 Essa a ra trompla Doue, mæs e c'hon zou a zo lach,  
 Rac en instant ma cav ur potr e'tol e froc e golach,  
 E tev habit ha chapelet evit commanc ar menach.

Trivac'h vloas n'eus an dancerez : pa gav eur potr e teme,  
 Hijet e bet hac adhijet couls en nos evel en de :  
 Ar pez a van goude hija a larer na dal netra,  
 Couscoude ar potr e c'hemer a zo oll carguet a joa,  
 Ha var ben eun neubet goude e laro *mea c'hoas*.

— 4 —

M'e guelfac'h ebars en dançou, ounnas a zo eur fleuren !  
 Admira a ra ar botret e c'hoantis hac e skient ;  
 Excellant a voa d'al labour, menageres ar gaëra,  
 Bep nos divea da gousquet, sevel a re da guenta,  
 Preciussa greg a vije ! Mæs chenchet e zè brema :

Mar boa coant, pa oa plac'h iaouanc, brema e vil da fleryal ;  
 E c'hotillon zo cramennet, e bleo tennet var e zal,  
 Dibren e ganti e dillad, collet ganti e spillou,  
 Ar vic'hien demeus e fri a ziver en e guinou,  
 Evit e zouch, hep n'em vastar eo, ret caout pincetezou.

Sancesse e ma o cluchenni e ty e c'homerezet,  
 Pried, bugale ha menah, oll e vent abandonnet ;  
 Ne voar na canna na goalc'hi, na memeus scuban e zy ;  
 Ne vanc na plous na c'hoen ennañ ; carguet e a loussoni,  
 Evit antren hep vomissan e ret stnafa stard ar fri.

Pa ha an itron var e zorchen azeet en e c'hoaze,  
 Ha pa ve an tan dindanni, na zavo quet a c'hane ;  
 Impliget e tout ar voyenna neus quen manet netra,  
 Ret e brema chanch-a vicher ret e mont da glasq bara  
 An osac'h, lec'h dont d'e c'honsol a deu prest de bahata

Catu ama eur zon neve, cetu ama eun danç all ;  
 Chasse-huit e ret da ober, pe vea scoët ractal ;  
 Ha pa vanc'o an danceres, deus-tu devo eur vazad,  
 Hac ouspen, eun tol troad en e reor ma na ve buon a droad  
 An dans quenta vo amiabl, mæs oma na nequet mad.

Finissan ran va chanson na bad pelloc'h va sujet,  
 Ho pedi a ran dam excus, mar e meus oc'h offancet,  
 Quement ma so abuzou, n'o guelomp nemet re bemde,  
 Hac a deu, sivoas, re alies d'offanci e Vajeste  
 Bea int motivou indeçant eus a re a liberte.



(Propriété)

Lannion imp. veuve Le Goffic.